

15

En hor parrez, dre ho pennos,  
Ra vevo feiz hon tadou koz!  
Hon diouallit diouz ar skuer fall  
A ra goassoc'h eget tan-goal.

} bis.

16

D'ar vugale roiñ ar furnez,  
D'ar iaouankis ar zantelez,  
Ha d'ar gosni guir joausted,  
D'an oll bennoñ hag eürusted.

} bis.

17

Sikour ive d'ar bec' herien!  
Roit d'ho spered ar sklerijen  
Hag an domder d'ho c'halonou  
Gant eol benniget ho krassou.

} bis.

18

Lezit ar gliz euz ho pennos  
Da ziskan varnomp deiz ha nos,  
Ma zayo puil frouez an douar  
Dindan eol-tom ha glao klouar.

} bis.

19

Gant alc'hoez aour ho pedennou  
Digorit deomp dor an envoi,  
Ha ni gano deoc'h mill bennoñ  
E kreiz dudi ar barados.

} bis.

Quimper, le 6 Février.


IMPRIMATUR :  
A. SERRÉ,  
vic. gén.



8N2-5-050

# DA ZANT THURIEN


MEULEUDI HA PEDEN



*Andante.*



Kanomp, Ka-nomp gant leve-nez Meuleudi



Patron ar bar-rez, Ha goulennomp, dre ar be-



den, Eus he ven-nos an a-lu-zen, Ha goulen-  
*rall.*



nomp, dre ar be-den, Eus he vennos an a-lu-zen.

2

E kichen Dol e zo ganet  
Ha Thuriën e voa hanvet;  
Var he gavel lagad Doue  
A voa o para nos ha de.

} bis.

3

Dizale Thurien a voa  
 Eur bugel euz ar re goanta :  
 Lagadig glas ha bleo melen  
 Mouez eostik o kana laouen : } *bis.*

4

O kana laouen da Zoue  
 Fers meuleudi a garante,  
 En eur zioual denvedigou  
 Var letoun flour an torgennou. } *bis.*

5

O velet ar bugel santel  
 Gant spered lem, skiant huel,  
 Arc'hescob Dol a lavare :  
 Va bugel koant, deus ganen-me. } *bis.*

6

Mill bennos deoc'h, o va Otrou !  
 Ha ken-avo, denvedigou !  
 Ho tilezel e ran joaüs,  
 Evit beza oll da Jesus. } *bis.*

7

A zivar neuze ar mesaer  
 A ra buan eur studi kaer ;  
 Evit beza den a Ilis  
 E ro bouked he iaouankis. } *bis.*

8

Beleg iaouank, meuleudi deoc'h !  
 Spered Doue a zo ganeoc'h ;  
 Ho santelez a zo dispar,  
 Eun El e zoc'h var an douar. } *bis.*

9

Gant ar veleien hag ar bob  
 Choazet da veza Arc'hescob,  
 C'houi a gasso d'ar peuri mad  
 Denved Doue, hor guella Tad. } *bis.*

10

Nag a draou kaer ha burzudus  
 Gret ganeoc'h-en hano Jesus,  
 En eur brezeg, var douar Breiz,  
 Lezen Doue d'an dud difeiz ! } *bis.*

11

D'ar c'hlanvour kez c'houi ho peus roet  
 A bers Doue nerz ha iec'hed,  
 Ha d'ar maro eun eil vuez  
 Dre eur beden a garantez. } *bis.*

12

Goude buez ken burzudus,  
 Eur maro santel hag eürus  
 A zigoras deoc'h, Thurien,  
 Ar barados evit biken. } *bis.*

13

Gant an Ilis, hor Mam zantel,  
 C'houi 'zo savet e renk huel  
 E touez ar zænt hag an Elez,  
 Gant kûrunen ar zantelez. } *bis.*

14

Euz bar an-env sellit brema  
 Diouz ho pugale o kana,  
 O kana deoc'h meuleudiou  
 Gant ho c'halon hag ho moueziou. } *bis.*